



## RAKTRES AR WELADENN

1

Kizellerezh	Glad an XXvet kantved	
-------------	-----------------------	--

2

Kizellerezh	Chapel-Gwiadannoù	Orfeberezh
-------------	-------------------	------------

3

Livouriezh
------------

T eulioù an dihelloù kavet a-hed an diskouezadeg a ziskleir daou vennad :

- da gentañ an dihelloù o tiskouez doareoù sevel an oberennoù ;
- d'an eil un displegadenn war danvez ar renabloù kozh o tiskouez stad an traoù kavet en ilizoù ha chapelioù an departamant.

Panneloù kelenn a zo aze evit diskouez labour hirbad an adsaverien, "medisined an arz", o deus da gefridi adreiñ buhez d'an oberennoù mac'hagnet gant an amzer, an ankouazh pe an droukyoul.

### Kuzul reizher :

An aot. Olivier Couqueberg, Rener Servij departamantel an Displegadur sevenadurel.  
An aot. Monsieur Alain Droguez, Rener an Diellou departamantel  
An aot. Claude Le Potier, Rener Burev an Aferioù sevenadurel (Kuzul-meur Aodoù an Arvor)  
An aot. Francis Muel, Rener rannvroel an Niveredigezh arzel

### Rener gouiziegezhel :

An aot. Philippe Bonnet, Enseller ar Savadurioù istorel

### Komiser an diskouezadeg :

An intron Marie-Joe Menez

### Penn-micherejour :

An aot. Michel Guillemot

### Leurenner :

An aot. Eric Michalet

Attachée de Presse :  
Madame Laurence Brisard

Priz : 10 lur

Diskouezadeg aozet gant Kuzul-meur Aodoù an Arvor, gant skoazell Ministrerezh ar Sevenadur hag ar C'helaouiñ, ha gant kenlabour Kuzul ar rannvro.



Poltred priñsez Lambal gant Jean-Laurent MOSNIER - 1780 (Lambal)

## “TENZORIOU KUZH AODOU AN ARVOR”

1000 BLOAVEZH ARZ HAG ISTOR

### E KASTELL AR ROC'H YEGU 22260 PLOEZAL

EUS AR 1 AN A VIZ GOUHERE D'AN 31 A VIZ HERE 91

Unan eus an departamantoù pinvidikañ e Frañs eo hini Aodoù an Arvor evit pezh a sell ouzh an arbeuri dastumet en dastumadegoù publik pe brevez. Oberennoù arzel, livet, kizellet, orfebet ha brodet en em gav eno, strewet e meur a gantad lec'hioù mirout. Anavezet eo darn anezho, ha ne vezont ket dre se disoñjet pe lezet a gostez, reoù all a zo bet kavet nevez 'zo gant "Ensavadur-diwall an Hendraoù hag an oberennoù arz", en e garg niveriñ ha diwall an oberennoù hag ivez asuraat e vefent miret da vat. Pep hini anezho he deus, hervez ali an holl, un dalvoudegezh istorel, arzel pe gevredigezhel.



Conseil Général  
des Côtes-d'Armor



## DAMSKEUD AR C'HIZELLEREZH EN AODOÙ AN ARVOR

■ (Saliou 1 A - 2 A)

Digeriñ a ra ar milved-mañ gant kinnig ur c'hloc'h-dorn o tont eus parrez Paoul (nenn 45). Heverk eo an elfenn-se eus liderezh keltiek ar c'hrennamzer koshañ.

Diskouezet eo ar skulterezh dre ur rannadur e daou heuliad istorel bras :

### 1. Ar maread krennamzerel (sal 1 A)

Un arouez eus an urzhioù-prenañ graet gant ar gloareged hag ar breladed, an noblañsoù hag an dud-e-karg eo an oberennoù bodet amañ.

Meur a skeudenn a gav o awen en ur rollad o tennañ d'ar gerentiez santel : Santez Anna hag ar Werc'hez o terc'hel ar Mabig Jezuz (nenn 1) hag ar C'hrist war ar Groaz (nenn 2-3). Tudenn ar Werc'hez, ken doujet e Breizh a weler e daou zarvoud a-bouez : degemer a ra kemenn an arc'hael Gabriel e La Ferrière, ha neuze en em ziskouez ivez o wilioudiñ (nenn 4 hag 8).

### 2. An azginivelezh hag ar barok (sal 2 A)

Arouezius eo dibunadeg ar sent eus kredennoù ar Vretoned war efedoù mat an hanterourien, brudet hag arbennik. Sant Jorj e vertuzioù marc'hek (nenn 11), Sant Mikael penn armeadoù an Nefivoù (nenn 13), Santez Vadalen, ar bec'herez keuzeudik (nenn 10), ha Sant Paol ar c'hantroad, a zo souezhus-holl dre o dilhad meurdezus hag o emzalch dramael.

Gant meur a skouer e tiskouezer pegen liesseurt e oa ar stalioù-labour kizellañ oberiant en Aodoù an Arvor. Ar Werc'hez gant ar Mabig Jezuz e Plec'herel (nenn 12), un oberenn digant Gervais II Delabarre a laka anat penaos en em ledas e Breizh arz ar gizellerien douar eus ar Maine, tra ma tiskouez ar Sant Paol eus Pleboull (nenn 14), labour un arzour lec'hel, an tregeriad Yves Corlay.



## MEULEUDI AR CHAPEL

■ (Sal 2 B)

Evel m'en deus Umberto Eco savet ar manati ijinet met ken gwirion "Anv ar Rozenn", a-ziwar elfennoù amprestet digant abatioù meur ar C'hornog krennamzerel, hon eus klasket amañ adkrouiñ aergelc'h ur chapel-skouer : da lavarout eo, n'eo ket bet dibabet an oberennoù strollet amañ, d'an nebeutañ a-ratozh-kaer, hervez barnadennoù istor an arz. Fellout a ra dezho reiñ un testeni eus ur sevenadur, aet da get gwir eo, met bev ennomp evelkent dre veur a zasson :

Ha da gentañ bagad ar Sent, un danvez diheskus evit rummadoù kizellerien, livourien, ha gwerennourien (nenn 25). Santez Anna, ganti neuzioù ur vamm gozh madoberus (nenn 22). Erwan an tregeriad (nenn 26) o taolenniñ abaoe kantvedoù evit an dud uvelañ ar Reizhder enep galloud an arc'hant ; Sant Roc'h (nenn 23) o tiwall diouzh ar c'hleñvedoù-red, hag Izidor (nenn 24) o tiwall an eastoù.

En ur dostaat hemañ ouzh ex-voto mor ar Maria (nenn 32), unan eus ar re goshañ en Europa, e lakaer anat, gwelloc'h eget gant nep displegadenn bennak, daouelezh diazez Breizh : Armor-Argoad.

Letrinoù (nenn 18-19) ha kantolorioù (nenn 20) a zo anezho an arrebeuri end-eeun, ar stern-aoter o vezañ ar pezh pennañ anezho. Ar re-mañ a sternie alies taolennoù aoter ma tlee an tudennoù anezho broudañ ar fideled d'en em soñjal war ar finvezioù diwezhañ (nenn 27-28).

Ar rod-brimbalerezh (nenn 21) a ro da anaout evelato e chom bev ar brizhkredennoù. Met ul lodenn vat anezho a gomz dimp dreist-holl eus ar marv : evel testeni hon eus bezañ an Ankou (nenn 29), un horolaj (nenn 30) hag ur c'harr-kañv (nenn 31) ma splann warno skeudenn ar marv. Levezonet-don eo bet gant ar marv ar Vretoned, daoust na zegase "na houg na doujañs".






## AR GWIADENNOU : DILHAD-LID EN ARVAR ?...

■ (Sal 2 B)

Evel-just, displeberet eo bet an traoù gant an amzer o tremen ha breskter an danvezioù, hep komz eus an eskibien a alie, e-pad o gweladennoù pastorel, da zeviñ an dilhad-lid uzet-tre. Distrujadennoù an Dispac'h bras a zo bet ivez..., hag en diwezh ar sened meur Vatikan II en deus roet tro da zilezel an dilhad-lid kozh na glotent mui gant "C'hwezh an spered nevez". Sebezus eo eveliato ar pezh a chom eus ar peadra hengonnel-se en ilizoù Breizh.

E-touez an dilhad-lid e vo notet dreist-holl kazul Lannveogon (nenn 35) gant e ginkladur awenet gant "levrioù ar bleunioù", embannet er XVIIvet kantved. Deiziadet en XVIIIvet kantved, eo bet savet en hevelep mare hag ar bannieloù miret, implijet c'hoazh en deiz a hiziv e-pad ar pardonioù hag a guitao, ul lodenn anezho, an diskouezadeg-mañ e-kerz un devezh evit kemer perzh enno.



## AN ORFEBEREZH RELIJIEL

■ (Sal 2 C)

E-touez an teñzorioù kozh e c'hellfe an orfeberzh relijiel bezañ e mesk ar re gentañ. Talvoudegezh ar metal, sakrelezh traozoù 'zo, o implij miret evit al liderezh hepken, kement-se holl a zispleg a-walc'h perak eo bet lakaet an oberennoù-se er maez eus gwel, a-ziavaez d'al lidoù.

Ar pezhioù orfebet-mañ a zo diskouezet amañ en dro d'ar meiziad a deñzor ijinet, diazezet a-ziwar obererezhioù orfebourien eus ar vro ha pariziat, miret en departamant abaoe ar XVvet kantved.

Ar pezhioù koshañ, hep minaoedadur warno, a zo chomet dianav o orin ; an ardramezioù, avat, hag int boutin, a ro dimp da c'houzout diwar-benn an donezonerien (relegva Logivi-Lannuon ha Plourac'h, nenn 54). Enskrivadurioù latinek pe c'hallek a zegas a-wechoù un arliv barzhonius bennak (nenn 52).

Adalek ar XVIvet kantved e kresk niver an oberennoù minaoedet, o reiñ da c'houzout an oberourien veur : Yves Donné (nenn 54) ; un oberenn bariziat a zo sinet gant Jérôme Acher (nenn 57). Met eo merzout pezhioù a dalvoudegezh, daoust dezho bout dizanv, evel ostañsouar an Aeled eus Meslin (nenn 62), lestr-ezañs Lannuon (nenn 73), pe vreizhat evel hanterzelwenn-relegva Santez Berc'hed e Trigavou (nenn 72) sinet gant ar mestr Guillaume Hamon.

E-touez an traozoù prizioù-se notomp kazul Sant Erwan, ur pezh seizenn deiziadet eus an XIIvet kantved, sakradelaet bremañ evel relegoù (nenn 33).



## ISTOR AL LIVOURIEZH EN AODOU AN ARVOR

■ (Sal 3 A - 3 B - 3 C)

N'eo ket bet diskouezet oberennoù eus ar XVIvet kantved en istor-mañ al livouriezh, rak e-pad ar c'hantvet-se eo e voe en o splannañ an taolennoù livet war mogerioù an ilizoù (Kervaria an Iskit) pe war volzoù lambrusket ar chapelioù (Kastellzodren, Plougousskan). An doare arz-se a bado e-pad ar XVIvet kantved en e bezh.

Digor e voe Breizh er XVIIvet kantved d'an eskemmoù arz gant ar rannvroioù nesañ, evel m'en diskouez "Azeulerezh ar Rouaned" digant Jean Boucher eus Bourges (nenn 90). Met n'eo ket serr ouzh an oberennoù deuet eus an diavaez, dre ar prenadennoù hag ar roadoù graet gant pennoù-bras desket, a roio labour tro-ha-tro betek an XIXvet d'an arzourien estren, al livourien vreizhat pe pariziat.

■ (Sal 3 A)

Taolennet eo amañ eta ar XVIIvet kantved gant un oberenn arzel savet war-eeun er stalioù-labour spagnat o labourat war chanter an Escorial (nenn 89), ha gant div daolenn livet o tont eus Bro-Flandrez (nenn 91, 92), hag erfin gant un oberenn digant un arzour bolonat eus diwezh ar Seicento (nenn 93).

■ (Sal 3 B)

Spisverket eo an XVIIIvet kantved gant diorroadur kinkladurioù bras ar sternioù aoter, un elfenn pennañ eus al liderezh war-lerc'h Sened-meur Trento. Savet e voe neuze miliadoù a daolennoù aoter gant stalioù-labour al livourien niverus e Breizh d'ar c'houlz-se. Kavout a raer sinadurioù brudet evel re Charles Hamonic (nenn 94) pe reoù an tiegezh Le Corre (nenn 95). An danvezioù dibabet a daolenn buhez ar Sent (nenn 96). Ouzhpenn-se arz al lez a zo taolennet en un doare dreist gant J.-L. Mosnier war ur poltred eus ar brinsez a Lamball (nenn 97).

■ (Salle 3 C)

Echuiñ a ra an droiad gant un eñvoradenn eus henruid an dugelezh (nenn 100), ha gant livadurioù oc'h eñvoriñ stummoù bras arz an XIXvet kantved : nevez-glaselezh (nenn 98, 99), kentrafaelezh (nenn 102) hag arouzelezh (nenn 103).

*Azuladur ar Rouaned  
gant Jean Boucher (Pempoull-Plouez)*



## GLAD AN XXvet KANTVED

■ (Sal 1 B)

Daoust ma teuas awen al livourien eus skol Pont Awen diwar liested ar gweledvaoù, ar savadurioù ha hengounioù Breizh, e kavas tuadoù kevrennel arzourien zo da adsevel an arz relijiel.

Paul Serusier, dedennet gant krouidigezh un arz sakr nevez, a savas adalek 1904-1905 kinkladurioù bras evit an ilizoù (nenn 105). Met ne raio ket kement a verzh ha Maurice Denis e Perroz-Gireg (nenn 108, 110, 112), a savas adalek 1919 ar "stalioù-labour a arzoù sakr".

"War ul linenn genstur, e heuilh an arz breizhek rik hent an adsav broadel ; ur rollad "keltiek-breizhed" a ziwanas e stalioù-labour Alfred Ely-Monbet (nenn 106). Da heul an taol-esa-se e teuas, adalek ar brezel-bed kentañ, oberennoù all gant strollad ar "Seiz breur" renet gant Jeanne Malivel (nenn 107) : kizellerezh, tisavouriezh, engravezh, gwiadennoù, poderezh-pri... Heñvel dra evit ar "stal labour breizhat evit an arz kristen", a voe savet e 1929 dindan paeroniezh James Bouillé (nenn 120) ha Xavier Langleiz (nenn 111). Berzh a raio an emsaviou-se, ken e kemerjont ul lec'h uhel en Diskouezadeg hollvedel e 1937. Diouzh un tu all e ra berzh ivez ar c'hizellerezh bras e doare savadur, diskouezet amañ gant oberennoù an arzourien Francis Renaud (nenn 114) hag Armel-Beaufils (nenn 109), dreist-holl war-lerc'h ar brezel-bed kentañ.

Met dianav ha bresk eo an arz breizhat-se, kenpred ouzhimp en amzer, ken eo talvoudus-bras dimp mirout an testennoù arouzeusañ anezhañ.

*Ar spilhenn ziwec'h  
gant Armel-Beaufils (Landreger)*